



GALIZA

**Ur bobl gant un istor
o stourm evit un dazont
e frankiz**

► Gwel meur eus Plasenn ar c'h-Quintana,
Gouel Broadel Galiza 1995

Galiza: ur vroad

Lec’hiet emañ Galiza war penn pellañ talbenn gwalarn ar Meurvor Atlantel el Ledenez iberek, hag abaoe 1933 eo bet anavet ez-ofisiel evel broad gant 9vet Kendalc’h broadelezhioù Europa, stag ouzh Aozadur ar Broadoù. Galiza a zo ganti bep perzh objektivel ret evit gallout ober ur vroad anezhi. Hen diskwel a ra hon istor-ni – kuzhet ha displeberet – kaset da benn war a-hed an amzer meur a stourm evit ma vefe anavezet hon gwir da vezañ dieub evel pobl.

An hini gentañ da vezañ savet e Europa e oa Rouantelezh Galiza, a-raok zoken diskar an Impalaeriezh roman, ganti ur vuhez dizalc’h hag ul levezon bolitikel ha sevenadurel bras-tre dre al Ledenez a-bezh a-hed ar Grennamzer. E hen broviñs roman Gallaecia an hini eo ma oa bet ganet en VIIIvet kantved ar yezh graet ‘galizeg’ anezhi ganimp hag anavezet evel ‘portugaleg’ dre ar bed-holl.

Adal ar XVvet kantvet e teuas Portugal da vezañ ur rouantelezh penn-da-benn ha neuze e kouezhas Galiza dindan beli Kastilha ha da c’houde hini Spagn, nac’het ganti hiziv c’hoazh anavezout gwirioù ar broadoù en em gav e diabarzh Stad spagn.

A-viskoazh eo bet Galiza ur vroad ganti meur a zanvez ekonomikel. Al labour-douar hag an desaverezh loened a c’hoari hiziv c’hoazh ur roll a-bouez evel unan eus diazezoù pennañ hon ekonomiezh. Nerzh pennañ ar Stad a-bezh eo Galiza e-keñver ar produiñ laezh ha koad. A-drugarez da istor merdeñ hir meurbet Galiza, eo deuet da vezañ ur vro benañ e-keñver ar pesketa hag ar c’hreginerezh, ganti

unan eus lestrazoù brasañ Europa. A-hed an amzer he deus talvezet an energiezh produet e Galiza evit industrielaat lec’hioù all er Stad, evel Madrid (produet tamm ebet eno) : kaset e vez da lec’h all 40% eus an energiezh produet ganimp en ur c’houzañv ni an efedoù war hon c’hevredigezh hag hon endro.

N’en deus ket diwanet diwar an holl binvidigezhioù hag ar barr-se ur rouedad industriel hag ekonomikel a-vent gant ezhommoù Galiza avat. Ar sujidigezh politikel hag an diouer a varregezh evit en em c’houarn hon-unan a gasas d’un isdiorroadur ekonomikel, ken m’eo deuet ur vro bividigik e-keñver he danvezioù da vezañ ur vro baouraet.

Ha koulskoude, n’eo ket deuet a-benn an argerzh trevadennerzh hag heñvelekadur-se da vougan c’hoant Galiza da vezañ emveli. Bev emañ c’hoazh ar yezh a-drugarez d’ar bobl hag abaoe an XIXvet kantved e krogas pobl Galiza d’en em aozañ dre sevel luskad an dieubidigezh vroadel dindan stumm ar vroadelouriezh c’halizeg.



► Kan broadel Galiza e Plasenn ar c'h-Quintana, d'ar 24 a viz Gouere 2005.

Ar vroadelouriezh c'halizek a zo anezhi respont demokratel hon fobl da sujidgezh ekonomikel ha moustradur sevenadurel ha politikel Galiza hag a vir ouzh araokadur hag hevoud pobl Galiza.

Petra eo ar vroadelouriezh c'Halizeg

Abaoe ar bloavezhioù 1960 e tiwanas tamm-ha-tamm nerzhioù brogarour awenet gant ar skouer boulc'het gwezhall gant Breudeuriezhoù ar yezh hag ar Strollad Galizegour.

Galiza he deus kaset da benn meur a stourm a-hed an wezh war an dachenn sokial hag e-touez al labourerezed/ion hag al labourerezed/ion-douar: a-enep da zistruj hon endro ha da breizhadenn hon danvezioù naturel; o tifenn hon yezh hag hon sevenadur; hag o difenn ar frankizoù demokratel hag ar gwirioù broadel.

Talvezout a ra ar vroadelouriezh c'halizek da reiñ lusk d'an emsavioù sokial. Oberiant emañ war

bep tachenn: ar stourm evit difenn an endro, ar venelouriezh, al luskad LGDT, difenn ar gwirioù yezhel, gwirioù ar studierezed/ion ha gwirioù ar micherourezed/ion, h.a. O lakaat e pleustr pennaenn an emaozadurezh meneget a-us, e kaver Bloc'had Broadelour Galiza o labourat war dachenn ar politikerezh, keit ha ma stourm Kengevread Etresindikadel Galiza (CIG), sindikad pennañ ar vro, evit difenn gwirioù renkad al labourerezed/ion, o labourat dorn-ha-dorn gant al luskad sokial ledan-kenañ oberiant war dachenn pe dachenn evel difenn ar hon yezh hag hon sevenadur.



► Skeudenn hollvrudet bet implijet e meur a embannadur broadelour e Galiza tennet da geñver ar Gouel Broadel e 1994.

Petra eo Bloc'had Broadelour Galiza?

Krouet e oa bet Bloc'had Broadelour Galiza e 1982 evel Talbenn Brogarour, o lakaat fin da argerzh adframmañ ar vroadelouriezh c'halizek. Abaoe 1990, en deus BNG ur skourr arbennik evit ar re yaouank anvet Galiza Nova.

Un aozadur broadelour eo BNG, difennet gantañ emveliegezh vroadel ha dieubidigezh sokial ar vroad c'halizek evit ma c'hello dont da vezañ ur Stad emveli, demokratel, laik ha republikan, d.l.e. Republik Galiza.

Hiziv eo deuet a-benn BNG da c'hounit souten ul lodenn vras eus ar gevredigezh hag ivez ur pouez bras en ensavadurioù a-drugarez d'e guzuliered ha kuzulierion-kêr hag e vaer.ez.ed dre ar vro a-bezh. Meur a zileuriad.ez en deus ivez e Breujoù Galiza, ennañ ur gronn parlamantel niverus gantañ, hag ivez kannad.ez.ed e parlamantoù Spagn hag Europa.

E 1999 e oa bet savet gant BNG an Diazevadur Galiza Sempre, pledet gantañ war ziv linenn

bennañ : diouzh un tu, reiñ lusk d'ar preder sokioekonomikel, politikel ha sevenadurel e Galiza, ha diouzh an tu all gwareziñ ha brudañ memor istorel Galiza, dreist-holl an hini a denn d'ar vroadelouriezh c'halizek.

Evit tizhout ur sevenadur politikel nevez diazezet war al liesseurtegezh, an Diazevadur en deus ledanaet e dachenn dreist da vevennoù Galiza dre stardañ liammoù gant aozadurioù all eus an tu-kleiz emveliour dre Europa a-bezh a-drugarez d'ar Förum Soberanista ha d'an Diazevadur Coppieters, bodet ennañ aozadurioù a zifenn Europa ar pobloù hag ar gwir d'en em didermenañ.



► Unan eus ar votadegoù e-kerzh Bodadenn diazezañ BNG, dalc'het e kêr A Coruña e 1982. Luc'hskeudennoù gant Xan Carballa.

BNG a zo war un dro un nerzh vrogarour hag etrebroadelour, difennet gantañ gwir holl bobloù ar bed da vezañ dieub ha da zibab evite o-unan en un doare emveli ha diskleriañ a ra e gengred klok gant pep bro o stourm evit he frankiz.

BNG, un nerzh politikel etrebroadelour hag enep-impalaerour

Un aozadur enep-impalaerour eo, rak nac'hañ a ra ar e teufe bro pe vro da vezañ dindan gaelge eben, o stourm a-enep d'an holl zoareoù moustrerezh, hag oc'h en em enebañ ouzh an holl zoareoù emell impalaerour pe oberiadenn bolitikel pe vilourel, o sevel a-du gant liammoù etrebroadel diazezet war ar c'henobererezh.

Ur bennaenn eo evit BNG difenn ar peoc'h dre ar bed, koulz hag an dizarmañ ha divodadur ar

bloc'hadoù milourel argadus en ur sevel a-du gant dirouestlañ an tabutoù etrebroadel en un doare difeuls ha demokratel.

Ouzhpenn-se, ec'h eo pennaenn hollbouezus BNG difenn gwirioù an dud ha stourm a ra a-zevri a-enep da bep seurt droukziforc'hañ, ne vern an abeg, d.s. al lec'h orin pe ar c'henelezh, ar yezh, ar relijion, ar revelezh pe an identelezh jener, pe forzh pehini all e ve.